

ADRIEN DE CARNÉ

BARZ AN ARVOR

KRISTEN HA BREIZAD DA VIRVIKEN !

AR MABIG JEZUZ

MISTER EN EUN ARVEST

Moulet evit an eil weach



BREST

Moulerez ru ar C'hastel, 4

—
1922

ADRIEN DE CARNE

BARZ AN ARVOR

891-
682

KRISTEN HA BREIZAD DA VIRVIKEN I

AR MABIG JEZUZ

MISTER EN EUN ARVEST

Moulet evit an eil weach



BREST

Moulerez ru ar C'hastel, 4

1922

Oberou A. de Carné, Barz an Arvor ⁽¹⁾

Breiz karet, pezh-c'hoari e tri arvest.

Ar yalc'had aour, c'hoari farsus en eun arvest (3^e édition).

Ar mabig Jezuz, mister kristen en eun arvest (2^e édition).

Kristof ar C'hreno, mister kristen en eun arvest.

An aotrou Flammig, c'hoari farsus e daou arvest.

Tarsisius, mister kristen en eun arvest.

Saig ar paotr fin, c'hoari farsus en eun arvest.

Barnedigez Doue, mister kristen en eun arvest.

Sac'h ar marichal, c'hoari farsus en eun arvest.

Judikaël, mister kristen en eun arvest.

Argalon vat, c'hoari plijadurus en eun arvest (2^e édition).

Ar c'hoz vedisin, c'hoari farsus en eun arvest.

Lilien ar Folgoat, mister kristen en eun arvest.

Ar mab foran, mister santel en eun arvest.

Fanch vras ha Fanch vihan, c'hoari farsus en eun arvest.

EVIT AR MERC'HED BIHAN

Noz Nedeleg, mister kristen en eun arvest.



(1) Ar pesiou ma a gaver e Brest, e moulerez ru ar G'hastell, 4.

ARGUMENT


Cette œuvre comporte l'Annonciation, la veille de nuit des bergers de Bethléem, l'apparition de l'étoile miraculeuse, la venue de l'ange annonçant la naissance du Christ, l'adoration des anges, des bergers et des rois.

Elle contient cinq cantiques : *Le Poème de la Reine des Cieux*, chanté par les anges après l'Annonciation, *la Prière nocturne des bergers*, *le Gloria des Anges*, *le Cantique à l'Enfant Jésus*, et *l'Hymne à la Crèche*, traduction de l'*Adeste* en breton, sur l'air que chante l'Eglise.

La belle œuvre de M. l'abbé Jouin, *la Nativité*, a fourni à ce mystère quelques idées, notamment celle du baiser donné par l'Enfant Jésus au plus petit des bergers et à la Très Sainte Vierge.

Plusieurs dialogues sont traduits littéralement de l'Evangile ; quelques épisodes reproduisent de simples traditions, reconnues, d'ailleurs, comme étant des plus vénérables. La musique des cinq petits poèmes intercalés dans le mystère est empruntée aux recueils de cantiques universellement répandus et approuvés en Bretagne.

Divin enfant Jésus, daignez maintenir dans votre grâce eucharistique et recevoir, dans la vie éternelle, avec les bretons fidèles qui vous adorent, celui qui a écrit cette œuvre toute remplie de votre amour.



TUD AR MISTER :

AR MABIG JEZUZ.

AR WERC'HEZ VARI.

SANT JOSEF, 30 pe 35 vloaz.

SANT GABRIEL, arc'heal.

MATHIAS, 5 pe 6 vloaz.

MERARI, 8 vloaz.

ARAM, 10 —

ZARA, 14 —

ELIFAL, 20 —

AMMIEL, 30 —

ELIEZER, 70 — bleo ha
baro gwen d'ezan.

Paotred an denved.

MELKIOR.

GASPAR.

BALTHAZAR, morian.

Rouaned.

C'HOUEC'H EAL.

TUD EUS A VETLEEM.

OFISERIEN oc'h heulia an tri Roue.

*Ar mister-ma a dremen, da genta, e Nazareth,
e ti ar Werc'hez Vari, hag eun nebeut goude, er
meaz, tost da Vetteem, hear Juda. Gweled an teatr
a zo ennan brankou gwez, o kuzat kraou ar C'hini-
velez. E penn diveza ar mister, ne vo ken da ober
nemet lemel lod eus ar brankou-ze, evit m'en em
ziskouezo ar C'hraou santel.*

KENTA LODEN

KENTA DIVIZ

AR WERC'HEZ VARI. *N'eus nemet hi azezet a gleiz,
o neza eur gegeliad lin.*

Echu eo va labour ganen evit an deiz ma. Setu
an heol o vont da guzat. Setu an noz o tont en dro.
Ar steredenn genta a welan o lugerni. Nag hi a zo
kaer ! Va daoulagad a zo eurus o sellet oc'h an
nenvou. An Aotrou Doue, a garan kement, a zo o
chom eno. Poent eo d'in lavarout va fedennou
dioc'h an noz.

*Sevel a ra, hag en em ta.a war he daoulin, da
bedi, he fenn savet warzu an nenv, he daouarn
lekeat e kroaz war boull he c'halon.*

Doue galloudus ! Doue madezeus ! Ho karoud a
ran gand holl nerz va ene, gand holl nerz va
c'halon. Krouer an nenv hag an douar, plijet
ganeoc'h kaout truez ouz kement tra ho peus great,
ha dreist pep tra ouz ar bec'herien geiz. O Doue !
leun a c'halloud, sellit ouz ho servicherezh. Ra zavo
va fedenn, etrezek ennoc'h, evel c'houez vat ar roz
e Jeriko, evel moged c'houek an ezans o tevi war
an aoter koat sethim gwisket gand aour melen !
O Doue ! leun a vadelez, prenit Israel hag hen
dizammit da viken eus e holl bec'hejou !

*Ar Werc'hez a laka he fenn en he daouarn, hag
a gendalc'h he fedenn goustadik. An arc'heal
Gabriel a zeu ebarz, eul lilien wenn en e zourn
kleiz. Stoui a ra dirazi, en eur, blega e c'hlin
deou. Ar Werc'hez, ha n'he deus ket her gwelet da
genta, a zo eun tammig spountet ouz her gwelout.*

II DIVIZ

AR WERC'HEZ. AN ARC'HEAL GABRIEL

AN ARC'HEAL

Me ho salud, Mari, leun a c'hras ; an Aotrou Doue
zo ganeoc'h ; benniget oc'h dreist an holl gragez (1).

AR WERC'HEZ, *spountet eun tamm atao*

A beleac'h e teu d'in me eun enor ken dispar ?
Ha perak ta ema eal santel an Aotrou Doue o
saludi eur Werc'hez paour ?

AN ARC'HEAL

N'ho pezet ket a aoun, Mari ; kavet ho peus
trugarez dirak Doue. C'houi a gonsevo hag e
c'hanot eur mab. Rei a reot d'ezan an hano a
JEZUZ. Heman a vezo bras, hag hanvet e vezo mab
an Huela.

An Aotrou Doue a roio d'ezan tron David, e dad ;
ren a raio e ti Jakob, ag e ren a bado da virvi-
ken (2).

AR WERC'HEZ

Ha penaos e c'hoarvezo an dra ze ? Me a zo en
em westlet da Zoue evit mat (2).

AN ARC'HEAL, *o sevel*

Ar Spered Santel a ziskenno ennoc'h, ha galloud
an Huela a c'holoio ac'hanoc'h gand e skeud. Setu
perag an Hini santel a vezo ganet diganeoc'h a
vezo hanvet Mab Doue.

Elizabeth, ho kiniterv, evit hi da veza koz, he
deus ive konsevet eur mab, hag ar miz ma eo ar
c'houec'hved d'ezi. Rak n'eus netra dreist galloud
an Aotrou Doue (2).

(1) S. Luc. Ch. I. 28.

(2) S. Luc. Ch. I. 30 à 38.

AR WERC'HEZ

Me zo servicherez an Aotrou. Ra vezo great d'in
hervez ho lavar (1).

An arc'heal a ya kuit, goustadik, war e gil, en
eur zellet atao ouz ar Werc'hez. Houma a jom war
he daoulin, o pedi, epad m'ema an elez o kana er
meaz, pell.

KANAOUENN ROUANEZ AN ENVOU

War don : *O va ene, kanomp bemdez,*

Pa vez, epad sklerder an deiz
Bleunvet al lili gwenn kann,
Gwennoc'h eget o dillad seiz
Gwennoc'h out, o rozenn c'hlan !

Serafined,
Kerubined,
Ha keuriou all a elez,
En em strollomp
Holl, ha kanomp
Kanaouenn ar Rouanez.

War da gurunenn leun a c'hloar
Stered ez eus, Gwerc'hez koant ;
Dindan da dreid, ema al loar,
An heol zo da wiskamant (2).

Serafined,
Kerubined,
Ha keuriou all a elez,
En em strollomp
Holl, ha kanomp
Kanaouenn ar Rouanez.

Ar goel a ziskenn.

(1) S. Luc. Ch. I. 30 à 38.

(2) S. Jean. Apoc. Ch. XII. 1.

V. aussi Saint Bernard, Sermon de l'octave de l'As-
sompction ; parag. 3, 6 et 7.

EIL LODEN

KENTA DIVIZ

AMMIEL, *e unan, o c'hervel ar re all gand eur vouez huel.*

Deuit 'ta ! hastit affo ta ! noz tenval eo anezi. Tremen a ra buan an amzer. Deuit da deuler evez oc'h an derved ; deuit, va breudeur. Ho kortoz a ran.

II DIVIZ

AMMIEL, ZARA, ELIFAL, ELIEZER

ELIFAL

Amzer zo, Ammiel, amzer zo. N'heñter ket kerzout ker buan ze epad an noz ma.

AMMIEL

Ha perak ta ?

ZARA

Perak ? Abalamour d'an dud. Eur maread tud a zo dre aman, eiz dervez zo. An henchou, striz pe ledan, ar parkeier, al liorzou, ar c'hoajou olived, ar c'hoajou oranjez, ar prajou a zo leun a dud, o vont hag o tont hep ehana.

Eliezer a azez, eun tammig pelloc'h, war eur bank.

ELIFAL

Hag an tiez ta, hag an hostalirion ! Kalz tud a zo e pep leac'h.

ZARA

Kear Vetleem a zo leun braz. Me zo eat da Vetleem deac'h. N'em eus gwelet eno nemet divroidi. Kalz marc'hadourien am eus gwelet ive, o dilliad marellet a bep seurt liou. Krial a bouez penn a reant, o kin-

nig da gement den a dremene o marc'hadourez hag o zraou a ziaveaz bro, laboused, frouez-balmez, frouez koko, fiez, avalou, baraou, kouignou, gwin koz, louzou c'houez vat, bokejou, ha me a oar me ? Aon am eus bet na vijen me deuet da veza bouzar ganto.

AMMIEL

Mat. Mar d'out bet bouzaret eun tamm, n'out ket deuet da veza mud, tamm ebet, a gav d'in. Na kaer eo da deod.

ZARA

An holl draou am eus gwelet oa kaeroc'h c'hoaz. Met n'ouzoun ket a beleac'h e teu eun niver ker bras a dud.

ELIEZER

N'ouzot ket an dra ze ? Selaou ta, va faotr. Bugale Israel a oa, gwechall goz, bugale Doue. Fellaat a reont bemdez dioutan, pell bras a zo, siouaz ! An neb a nac'h e Zoue, n'eus forz piou e ve, ha pa ve zoken pobl a Israel, an hini muia karet gant Doue, ne ra nemet mont mui-oc'h-mui war izelaat. Hon tadou koz oa sklaved dindan galloud ar roue Babilon. *Gant eur vouez krenvoc'h.* Ni zo sklaved an impalaer Rom, Sézar Aogust.

ZARA

Petra a ra ze d'in ? An dra ze n'hell ket displega d'in piou a zo o lakaat kemend all a dud da zont da Vetleem.

ELIEZER

Selaou ta, pennglaouik ! An impalaer eo a zastum an dud evelse e peb leac'h. Fellet eo bet d'ezan gouzout pet den a ioa dindan e c'halloud.

AMMIEL

Ne ket eaz niveri anezo. Rouantelez Aogust en em zalc'h war holl vroadou an douar.

ELIFAL

Gwir eo ; rak se an impalaer en deus embannet ar gourc'hemenn d'e holl zujidi mont da rei o hano war rollou ar renerien, pep hini er gear ma 'z eo bet ganet e lignez enni.

ZARA

Klevout a ran.

ELIEZER, *o sevel*

Hag an holl, ken ar re vihan, ken ar re vras, merc'hed ha goazed, a zo red d'ezo plega d'ar gourc'hemenn-ze. Setu perak ez eus kemend a dud e Betleem, kerkoulz hag er c'heriou all. Ha klevout a rez te mat, breman, paotrig ?

ZARA

Ia, Eliezer. Ho trugarekaat a ran da veza displeget kement se d'in.

ELIFAL

Sell ta ! Setu Aram o tont aman.

III DIVIZ

AN HEVELEP RE. ARAM

AMMIEL

Petra eo d'it, va mignonig, beza ken divezad o tont da ziwal da zenved ?

ARAM

Petra eo ? Traou brao kenan. P' edoun o kerzet war an hent, o tont aman, va daoulagad o deus bet plijadur o sellet warzu an env, ker skedus evel m'oa stered an Aotrou Doue Met traou kaeroc'h c'hoaz am eus gwelet.

ELIFAL

Ha petra ta ?

ARAM

Eur strollad elez, o saeou gwennoc'h eget an erc'h, o nijal huel huel, eus an eil penn an nenvou d'egile, eus an eil steredenn d'eben.

ZARA

Kousket a rez, a gav d'in, o lavarout d'eomp sorc'hennou evelse.

ARAM, *eun tammig droug ennan*

Ne gouskan ket, tamm ebet. Sell ouz-in ! Va daoulagad a zo digor frank. Gwelet em eus an elez kerkoulz a ma welan ac'hanout. Met koantoc'h egedout e oant, avat.

ELIEZER

Peoc'h ta, peoc'h ! Ha petra o deus great an elez goude ze, va mab ? *Kriadennou er meaz.*

IV DIVIZ

AN HEVELEP RE. MERARI HA MATHIAS

MERARI, *o krial, er meaz*

Aram, Zara ! Peleac'h emaoch hu ? Peleac'h emaoch hu ?

ARAM, *o sellet ouz ar meaz*

Tostait aman, tostait ; war ar wenodenn vat emaoch. Deuit aman, deuit.

MERARI, *o tont ebarz, dourn ha dourn gant Mathias*

An hent a zo bet kollet ganeomp da genta, noz evel ma 'z eo dindan ar c'hoajou.

AMMIEL

Aram a zo deuet divezad. Met c'houi ho taou a zeu divezatoc'h c'hoaz egetan. Evit petra ?

MATHIAS

Chom hor beus great da zellet ouz an dud o tremen war an hent.

AMMIEL

Da zellet oc'h tud eleac'h dont aman gand ar re all ?

MERARI

Ia, da zellet ouz an dud. Ha gant plijadur vras e sellemp outo. Bez ez oa eur goaz, eun itron yaouank gantan. Hema a zo eun den a zoare vat meurbet. Mez an itron yaouank avat, hounnez n'he deus ket he far.

ZARA

Ha penaos ho peus gwelet anezi awalc'h, en noz ma, ken tenval ?

MATHIAS

An den a ioa eur c'houlouenn-rouzin gantan da rei sklerder war an hent. Oc'h sklerijen ar c'houlouenn-ze hor beus gwelet an itron, ha ne gredomp ket e ve eur vaouez henvel ouz ar merched all.

AMMIEL

Ha piou e ve hounnez, neuze ta ?

MERARI

Ne ouzomp ket. Eur brinzez bennak a gav d'in, pe eur rouanez eus ar re vrasa.

ZARA

Eur gurunenn a oa ganti, marteze, war he fenn ?

MATHIAS

Kurunenn ebet. N'he doa war he fenn nemet eur goel hir, o tiskenn kaer war he diskoaz ; met kredi a ran stard evelato e ve eur rouanez e ve.

ELIFAL

Petra eo d'it kredi an dra ze ? Me garfe gouzout.

MERARI

Kaer bras eo an dremm anezi. Va mamm a zo koant, a dra zur ; va c'hoarezed bras a zo koantoc'h c'hoaz. An itron yaouank se a zo bravoc'h eget va mamm geaz, bravoc'h eget va c'hoarezed. Ar gaera anezo holl eo ; ha n'hellem ket distaga hor selladou dioc'h he daoulagad dudi.

ZARA

Penaos ho peus gallet chom da zellet outi keit all a amzer ? An dud se ne reant nemet tremen e biou d'eoc'h.

MERARI

N'eo ket. An itron hag an hini oa ganti, o veza skuiz, a rea eun azezig war ribl an hent. Rak se e c'hellem sellet eaz outo.

ELIEZER

Mat. Eleac'h sellet ker piz outo, dereatoc'h e vije bet d'eoc'h o saludi.

MATHIAS

Hen ober hor beus great ive.

ELIEZER

Ha penaos ta ?

MERARI

Evel-hen. *Merari a Mathias en em laka, o daou, war o daoulin, tost a dost, a dremm warzu an dud. Pep hini a laka e zaouarn kroazet, evel pa vefe o pidi.*

ELIEZER

Mat eo. Savit enn o sa, mignonedigou. Ha neuze, petra o deus lavaret ar re ze d'eoc'h ?

MERARI

Ger ebet. Met an itron gaer he deus sellet ouzomp gant eur mousc'hoarz laouen evel an heol o sevel. Goude ze, an daou zo eat kuit.

AMMIEL

Hag oc'h deuet aman dioc'htu ? *Klevet a reer pellik, trouz an dud o krial a unan. Ammiel a zell oc'h ar meaz.* Sellit ta ! sellit. Eur vandenn denved eo o vont kuit er meaz eus ar prad. It buan ta, Zara, Elifal, Aram. It buan da virout outo da vont kuit. Laoskit ar chas dioc'htu da c'haloupat war o lerc'h.

Zara, Elifal hag Aram a ya kuit. Klevout a reer ar chas oc'h harzal pell.

V DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet Aram, Elifal ha Zara*

ELIEZER

Mat a reont. Eur mesaer mat eo red d'ezan klask e zenved kollet, ken n'en devozo kavet anezo. Selaou ta, Ammiel. Petra eo, war da vennoz, holl lavariou ze ar vugale ? Unan a well an elez. Ar re all en em gav war an hent, gant tud divroad, hag en em daol war o daoulin dirazo evel dirak kannaded an Aotrou Doue. Petra sonjez te, Ammiel, eus an holl draou a welomp ?

AMMIEL

Ar re vihan ze n'o deus ket lavaret ar wirionez, marteze.

ELIEZER

Her lavaret o deus, Ammiel. Ar vugaleigou, pa

vez eur burzud bennak oc'h en em ziskouez d'ezo, ne lavaront ket gevier. Lavarout a reont, e leal, ar pez o deus gwelet. Darvoudou a bouez bras a c'hoarvezo, war an douar, ne vezo ket pell, a gav d'in. Ar bed a zo fall bras e lezennou ; an impalæred o deus savet ar falz doueou a enep gwir. Doue hon tadou. Hon Doue ni a zavo, d'e dro, a enep d'ezo.

Trouz er meaz, great gant Zara, Elifal, Aram ... mesaerien all.

ZARA

Sellit ta ! Sellit oc'h an nenvou ta ! Na skedus eo anezi ! Na kaer eo ! Sellit ta ! Deuit da zellet.

ELIEZER, *o komz huel*

Ha petra ta a c'hoarvez adarre ?

VI DIVIZ

AN HEVELEP RE. ZARA, ELIFAL, ARAM, *o tont ebarz o redek, o zri*

ZARA, *levenez ennan*

Deuit buan, Eliezer, Ammiel, deuit holl a dre ar gwez uhel ze. Digorit frank ho taoulagad ha sellit oc'h ar steredenn gaer meurbet se.

An holl a ya a unan velloc'h, hag a zav o daoulagad etrezek an nenv.

AMMIEL

Gwir eo, avat. N'em eus gwelet biskoaz eun all o para ker sklear.

ELIFAL

Na lemm eo he sklerijenn ta ?

ZARA

Lugerni a ra, gwenn-melen, liou arc'hant ha liou aour enni evel pa ve eun heol bihan e ve.

ELIEZER

Petra a fell d'ezan, an Aotrou Doue ?

Ema oskuilla e c'hras warnomp, me a gred,
gand ar steredenn zispar ze. Ar werelaouenn, hag
a zav da c'houlou deiz, eviti da veza steredenn
brava an oabl, ne ket ker kaer hag houn-hont.
Eur burzud nevez eo. Amiel ha me, n'eus ket
pell, a gomze eus a gement tra souezus a c'hoarvez
bemdez ganeomp. R'en devezo Doue truez ouzomp.
Ra zigaso, enn hon touez, ar roue bras a gomz
anezan ar brofeted, ar roue galloudus a denno
da viken Israel eus e boaniou, en eur zevel a nevez
e rouantelez. Pedomp a unan an Aotrou Doue.

AMMIEL

Ia, Eliezer ; pedomp hervez ho koulenn. A hend
all, ma ne fazian ket, an den a zo o teurel evez
war an tour bras, a zo o vont da zen, gand ar
c'horn, ar pedennou dioc'h an noz. Selaouit ! An
holl a zelaou. Klevout a reer, pell-pell, son ar c'horn,
hag eur vouez o krial :

Poent eo, va breudeur, poent eo lavarout ar
pedennou noz !

ELIEZER

Lavaromp ar bedenn, a unan, a greiz hor c'halon.

An holl a gan a unan.

PEDENN AR VESAERIEN

War don gallek : *Reine des cieux, jette les yeux.*

O Doue hon Tad,
A galon vat
Ni zo sentus bepred ouz da c'halloud
E kreiz an noz,
Ro da vennoz
D'an holl dud o kana dirazout.
D'an holl dud o kana dirazout.

Ro hep dale

D'az pugale

Azezet e skeud tenvall ar maro, (1)

Ar roue santel,

Mab Israel

Hag a vezo Salver ar vamm-vro.

Hag a vezo Salver ar vamm-vro.

ELIEZER

Ha breman, avat, en em lekeomp da ziwall mat
hon derved. Ar re vihan, pa zavo c'hoant kousket
ganto, a hello en em zastum er pallennou hor
beus digaset ganeomp.

MERARI

C'hoant kousket bras am eus, me.

MATHIAS

Ha me ive, avat.

ELIEZER

Mat. Deuit ho taou neuze, ma c'hallin lakaat
pallennou enn dro d'eoc'h.

*Eliezer a laka ar pallennou war an daou vuget,
hag a astenn anezo war an douar da gousket.*

MERARI, o chom atao dindan ar ballenn, met oc'h
en em lakaat en e goazez, hag o sellet piz warzu
ar meaz.

Ammiel ! Ammiel ! an itron gaer a welan, an den
mat ganti, o tont aman.

AMMIEL, o sellet

Peleac'h ta ? Ne welan ket.

MERARI

Sellit ! Emaint o kerzout war an hent striz a zo e
traon ar grec'hen, duhont.

(1) S. Luc. Ch. I. 79.

AMMIEL, o sellet

Ya, gwelout a ran breman ; met en em likit da gousket p'eo gwir ez oc'h skuiz, Mathias ha te. Allo ! kouskit buan ho taou. *An daou vogel a gousk.*

ELIEZER, o sellet

Feiz ! an daou vogel a lavare gwir. An dud se a zo dreist ar re all, war a weler.

ELIFAL

Doare an dud a lignez vras a zo ganto.

ELIEZER

Setu i tostik aman. Deomp kuit pelloc'h da welout petra a c'hoarvezo ganto.

An holl a ya kuit, o lezel an daou vogel o kousket, Jozef a zeu ebarz, ar Werc'hez gantan en tu deou, hep gwelout an daou vihan.

VII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR WERC'HEZ VARI, SANT JOZEF

JOZEF

Deomp dre aman da welout hag e vezo great d'eomp ni digemer laouennoc'h eget an hini hor beus bet eur pennad zo. Nemet evidoc'h n'em eus anken, Mari. C'houi zo skuiz maro, am eus aon.

MARI

E vefen skuiz pe ne vefen ket, kementi se ne ra netra. Ne fell d'in nemet youl Doue, ha netra ken.

JOZEF, o vont a zeou, da gomz oc'h unan bennak, ha ne weler ket ariëzan

Aotrou an hostiz, mar plij, goulenn a ran

diganeoc'h ma ve ho madelez lezel ac'hanomp da loja enn ho ti, en noz ma.

EUR VOUËZ

Kalz a dud a zo em zi, ha kalz re zoken. N'eus leac'h ebet aman.

MARI

Bennoz Doue d'ezan. N'en deus ket kaset kuit ac'hanomp gant fallentez.

JOZEF, o vont pelloc'hik, a zeou

Ezomm bras hor beus. Aotrou, eus eul leac'hig bennak da dremen an noz, va greg iaouank ha me. Houman a zo skuiz bras, ha diez eun tamm.

EUR VOUËZ RUST

Arc'hant ho peus ?

JOZEF

Tamm ebet, allaz ! Rak se ho truez eo a c'hou-lennomp.

AR VOUËZ, rust atao

Va zruez ? Petra eo an dra ze ? N'em eus na lojeiz na gweleou, nemet evit ar re o deus peadra en o godell. Ar re all a hell kousket er meaz, gand ar chas. Ne garan ket kalz ar beorien divroad, ar glaskerien bara, ar c'halouperien noz.

JOZEF

Me ho ped, a greiz kalon, enn han' Doue. Na livirit ket drouk komzou d'eomp. Evidomp da veza paour, ni zo bugale Juda. Hon tadou koz oa tud vras. Ar roue David a oe unan anezo.

AR VOUËZ, o c'hoarzin iud

Ha, ha, ha, ha ! C'houi zo mipien vihan David ha Juda, ha n'eus ket eun diner toull ganeoc'h ? N'em eus ket a amzer da goll evelse. It pelloc'h gand hoc'h hent.

JOZEF

Petra sonjit diwar-benn kement se, Mari ? Chom a rit hep lavarout ger.

MARI

Iedi Doue a ran, ennoun va unan, evit an hini a gas ac'hanomp kuit er meaz.

JOZEF, *o welet an daou vugel kouske⁺
hag o tostaat outo*

Sellit ta, Mari, an daou vugel ze o kousket er meaz. Bugale ar vesaerien eo, hep mar ebet.

MARI, *o tostaat*

An daou vihan eo a zo en em gavet ganeomp, en noz ma, war an hent. *O sellet piz outo.* Kaera bugale ! Kousket mat a reont. An hini bihanoc'h a zo koant evel eun ealig. Ra gouezo warnan, da viken, bennosiou an Aotrou Doue !

VIII DIVIZ

JOZEF, MARI, ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL,
AN DAOU VUGEL, kousket atao

ELIFAL

Petra glaskit hu aman, va zud vat ?

JOZEF

Digemer fall hor beus bet, n'eus nemet eur penadig, digant tud a jom tost aman. O klask eur gambrig bennag emaoun, ha n'hellan ket he c'haout.

AMMIEL

Ha ne gavot ket, avat. Tiez Betleem a zo leun leun, tiez diwar ar meaz ive, hag hon ti ni n'ema ket tost aman. Anez hon divije roet digor d'eoc'h, enn hon ti, ha digor frank.

MARI

Ho trugarekaat stard a reomp. C'houi zo tud a galon.

JOZEF

Bennoz Doue d'eoc'h. Deomp pelloc'h, Mari. Deomp eur weach c'hoaz, da Vetleem, en tu all d'ar gear.

Jozef ha Mari a ya kuit.

DIVIZ IX

ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL

ELIEZER

Poent eo, va mignoned, me a gred, ober an dro-noz, hervez ar c'hiz, a gleiz hag a zeou, da welout hag ez a mat an traou, e pep leac'h, diwar benn an dud, kerkoulz ha diwar-benn al loened.

AMMIEL

Mat, Eliezer ; en tu deou ez in.

ELIFAL

Ha me en tu kleiz.

ELIEZER

It kuit, ha ra vezo Doue ganeoc'h.

Ammiel hag Elifal a ya kuit.

X DIVIZ

ELIEZER, *e unan, o trei e zaoulagad warzu an nenv*

Doue ar Batriarched, Doue ar Brofeted ! Me, ho pugel paour ha dister, am eus an hardizegez da zevel va daoulagad leun a zaelou warzu an nenv m'emaoc'h ennan ! C'houi eo an Doue a zo a viskoaz hag a vezo da virviken. C'houi eo an Doue hag

ho peus eur vadelez ha n'he deus ket he far ! Roit ar furnez d'ar re goz evel doun. *O sellet oc'h an daou vogel kousket.* An re yaouank evel an daou vogel a zo kousket dindan va zreid, roit d'ezo nerz al leon, evit an holl draou mat m'ema ar vro garet o c'hedal diganto. Klevet ho peus, eur pennad zo, ar vesaerien geiz, va breudeur, o kana ho meuleudiou dindan ho stered lugernus. Klevet ho peus ar re ze o pidi ac'hanoc'h, en eur vouez, a greiz kalon, evit silvidigez an holl. O Doue mat ! ar bedenn ze eo a ginnigan d'eoc'h adarre. E ma ho ti santel o vont da goueza. Ema ho pobl o vont da netra. Digasit d'eomp an Hini a zavo tron David a nevez. Digasit d'eomp an hini m'emaomp ouz her gortoz, an hini a vezo Roue brudet Israel.

Chom a ra, eun tamm, o pidi ennan e unan.

Eur sklerijenn vuzudus a zav a zeou. Ar vesaerien all a zeu ebarz.

XI DIVIZ

ELIEZER, AMMIEL, ELIFAL, ZARA, ARAM

AMMIEL, *souezet braz*

Ne welez ket, Eliezer, ne welez ket eur sklerder kaer o/para, gwennoc'h eget hini an heol ?

ELIEZER

Eo, eo, her gwelout mat a ran. Lavaret em eus n'eus ket pell, e c'hoarvesfe meur a dra souezus ganeomp, hep dale. E kement se n'eo ket fazia am eus great.

ELIFAL

Sellit ouz ar sklerijenn lemm ze. Lugerni a ra mui oc'h mui.

ZARA, *spountet*

Sellit oc'h eun dra all ive, ta. Piou zo aze o kerzout en tu ma e kreiz ar sklerder ?

ELIEZER

Unan bennak eo o tont abêrz an Aotrou Doue a gav d'in. *An holl a grog aon enno. An daou vogel a zihun hag a zav en o sa.*

XII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AN ARC'HEAL GABRIEL

AN ARC'HEAL

N'ho pezet ket a aon ; rak digas a ran d'eoc'h eur c'helou hag a vezo eul levezet vras evid an holl bobl. Ganet eo hirio d'eoc'h, e kear David, eur Zalver hag a zo ar C'hrist hag an Aotrou.

Ha setu penaos e c'hellot hen anavezout.

Kaout a reot eur bugelig nevez ganet, mailluret he lekeat en eur c'hraou (1).

XIII DIVIZ

AN HEVELEP RE, AR C'HOUEC'H EAL, o tont ebarz (2)

KANAOUENN AN ELEZ

War don : *Pa voue ganet Jezuz.*

AN ELEZ, *a unan*

O tilezel an nenv alaouret,
War an douar ni a zo diskennet.
Hor spered a drid gant levezet
En eur gana gouel Ginivelez.

Gloria in excelsis Deo ! (2 w.)

(1) S. Luc. Ch. II. 10 à 12.

(2) S. Luc. Ch. II. 13.

Betleem, etouez keriou Juda,
 Daoust ma 'z out, avat, ar vihana (1)
 Gwelet e peus great, kearig santel
 Ar Zalver Jezuz enn e gavel.

Gloria in excelsis Deo ! (2 w.)

AN ARC'HEAL

Ha breman, mesaerien eurus, it da Vetleem,
 m'ema enni ar Mabig Jezuz oc'h ho kedal en e
 graou.

*An holl a ya kuit, o tremen e biou d'an elez. Epad
 m'ema Mathias o tremen, an arc'heal Gabriel a vir
 outan, goustadik, da vont kuit.*

XIV DIVIZ

AN ARC'HEAL, AR C'HOUEC'H EAL, MATHIAS

AN ARC'HEAL, *da Vathias*

Chom aze, eun tamm, va breurig. Chom aze. Me
 a oar mat me, da hano. Met her goulenn a ran,
 koulskoude, diganez. Lavar da hano d'in te da
 unan.

MATHIAS

Me a vez great Mathias ac'hanoun.

AN ARC'HEAL

Mat. Ha karoud a rez mat an Aotrou Doue ?

MATHIAS

Eur garantez vras am eus outan.

AN ARC'HEAL

Hag evidout da veza ken yaouank, her pidi
 stard a rez aliez ?

(1) Michée. Ch. V. 2.

MATHIAS

Bemdez, a greiz va c'halon.

AN ARC'HEAL, *d'ar c'houec'h eal*

Sellit gand evez ouz ar paotrig se. *Ar c'houec'h
 eal a zell outan, en eur vousec'hoarzin. An arc'heal
 a lavar neuze da Vathias :*

Kea buan breman da gaout ar re all, gant aon
 na zeufe d'it fazia war an hent. Kea, va c'hezik :
 Doue r'az miro !

Mathias a ya kuit.

XV DIVIZ

AN ARC'HEAL AR C'HOUEC'H EAL

AN ARC'HEAL

Va selaouit, elez eurus ar baradoz. Gwelet ho
 peus ar c'hrquadur bihan-ze. Ober a raio Doue
 traou bras anezan. O veza dirak tron Doue atao (1)
 goulaouet oun oc'h sklerijen an Aotrou hag anaout
 a ran kalz traou kuzet. N'eo ket arabad d'in lakaat
 ac'hanoc'h da ziski an traou ze. An Hini nevez
 ganet hirio, an Aotrou ar Christ, mab Doue, a vezo
 gantan daouzek den o labourat da zavetei ar bed
 Peger spountus, pegen heuzus eo ar pez en em zis-
 kouez d'in. Eun den a welan, etouez ar re en de-
 vezo great Jezuz eun dibab anezo, eun den a we-
 lan hag a werzo e vignon, e vestr, e Zoue ar C'hrist.
 Ma c'hellfe an elez gwela, daelou a enkrez a zeufe
 em daoulagad. Sellomp oc'h traou dudiusoc'h. Ar
 bugelig keaz ho peus gwelet, eur pennad zo, hag
 a reer Mathias anezan, hennez a vezo lekeat e
 leac'h an treitour, e leac'h mab ar gollidigez (2).
 Ar bugelig kaer ze, en amzer da zont, a zeuio da

(1) S. Luc. Ch. I. 49.

(2) S. Jean Ch. XVIII. 12.

veza sant Mathias, daouzekved abostol an Aotrou ar C'hrist muia karet (1). Ra vezo benniget, da virviken, an hini bihan ze !

Ha breman, va breudeurigou, deomp d'ar c'hraou santel, da azeuli Jezuz, mab da Zoue beo.

XVI DIVIZ

AN ARC'HEAL, AN ELEZ, AR MABIG JEZUZ
AR WERC'HEZ, SANT JOZEF

Lemel a reer lod eus ar brankou gwez e gweled an teatr. Ar c'hraou, kempennet ar gwella ma c'hellor en em ziskouez. Ar mabig Jezuz a gousk war eun dournad kolo. Ema ar Werc'hez azezet a gleiz. Ema sant Josef a zeou, enn e za. An elez en em laka en o c'hichenn, war o daoulin, tri a zeou, tri a gleiz. An arc'heal Gabriel en em laka en e za, adre ar c'havel.

XVII DIVIZ

AN HEVELEP RE. AR VESAERIEN

Ar vesaerien a zeu holl ebarz. Pep hini a zoug eun dra bennak, da ginnig d'ar mabig Jezuz, pane-radou avalou oranjez, kistin, kraoun ha traou all. An holl en em zastum a zeou hag a gan, a unan, drant ha laouen o mouesioù, en eur zellet gant karantez ouz ar Mabig Jezuz.

KAN AR MABIG JEZUZ

War don : *Il est né, le divin enfant...*

DISKAN

Ganet eo ar Mabig Jezuz !
Senit, senit, kornou-boud, bombardou !
Ganet eo ar Mabig Jezuz,
Ar bugelig karantezus.

(1) Actes des Apôtres. Ch. I. 26.

Bezit laouen, bezit eurus !
Tud an douar ma, elez en nenvou
Bezit laouen, bezit eurus,
Ha gloar d'eoc'h, Tad peurbadus.

Ganet eo...

Setu hor roue holl c'halloudus,
Ker gedet gwechall gand hon tadou,
Setu hor roue holl c'halloudus,
Setu hon heolig burzudus,

Ganet eo...

An ejenn keaz a zo doujuz
Dirak oanig Doue enn e graou,
An ejenn keaz a zo doujus,
An azen keaz a zo joaus.

Ganet eo...

Pegen e ve plijadurus
Ober d'ezan hor c'harantezioù,
Pegen e ve plijadurus
Ker koant ma 'z eo ha ker karus !

Ganet eo...

Setu kalz traouigou dudius
Kraoun, kouignou, kistin hag avalou,
Setu kalz traouigou dudius
Bleun gwenn, bleun melen ha bleun rus.

Ganet eo...

Ha dreist pep tra, fur ha sentus
En em roomp gand hor c'halonou,
En em roomp, fur ha sentus
Da viken d'ar Mabig Jezuz !

Ganet eo...

An holl vesaerien a ya dirak kavel ar Mabig Jezuz, Eliezer da genta, hag en e c'houde, Ammiel, Elifal, Zara, Aram, Merari ha Mathias. Pep hini, an eil goude egile, en em daol war e zaoulin, en em strink d'an douar, a laka e ginig dirak ar c'havel, a zav, hag a zeu en dro, a zeou. Endra m'emdint o tremen evelse, ar Mabig Jezuz a gousk en e gavel. Pa en deus roet Mathias e ginnig bihan, ar Mabig a zihun, hag a astenn e zivreaq'h etrezek ennan. Mathias a ya tostik tost d'ar c'havel, ha neuze ar Mabig Jezuz a bok d'ezan. Goude ma 'z eo eat kuit Mathias, ar Mabig Jezuz a zell ouz ar Werc'hez o vousec'hoarzin, hag a ro eur pok ive d'ezi. Steredenn ar Rouaned en em ziskouez, neuze, a uz d'ar c'hraou.

XVIII DIVIZ

AN HEVELEP RE. MELKIOR, GASPARD, BALTAZAR
OFISERIEÑ AN TRI ROUE

MELKIOR, o tougen eur varrenn aour melen, a
bleg e c'hlin deou dirak ar Mabig Jezuz (1)

Saludi a ran ac'hanout, bugelig nevez ganet, bugelig kaer meurbet. Daoust d'ar pezh a welan aman, daoust d'ar c'hraou dister m'emaout ennan, daoust d'ar bernig kolo hag a zo da wele, eur roue eo a zo aze dirak va daoulagad. Galloudus eo ar roue ze. Roue ar rouaned eo. Roue ha n'en deus ket e bar eo. Petra a vo kavet gwelloc'h da veza kinniget d'eur prinzh ker bras, eget aour ar glana ? Petra a vo kavet gwelloc'h da veza lekeat war e benn, eget kurunenn ar rouaned, kurunenn a c'hloar ma weler enni perlez ha mein talvoudus o lugerni ? D'it e kinnigan, o bugel muia karet, ar varrenn aour melen ma ; d'it e kinnigan va c'hurunenn ar gaera.

(1) S. Matthieu. Ch. II, 9 à 12.

Dreist pep tra, en em rei a ran d'it me va unan, va c'horf, va ene, ha va c'halon.

Lakaat a ra e gurunenn hag e varrenn aour dirak ar Mabig Jezuz, hag a ya eun tamm pelloc'h a gleiz.

GASPARD, o tougen eun arc'hig leun a ezans, hag o plega e c'hlin deou dirak ar Mabig Jezuz

Bugel bihan ker karet ganen, Melkior en deus da zaludet en eur rei d'it an hano a roue. Met piou eo eur roue hag a vez goulaouet e gavel oc'h sklerijenn eur steredenn ? Meur a weach, em bro bell, am eus savet va daoulagad warzu bolz an nenvou. Meur a weach am eus sellet ouz ar strolladou stered, ouz al loar goant da welout, ouz an heol skedus oc'h ober e dro. Deuet oun hirio, avat, dirak an hini a c'hourc'hemenn d'ezo mont ha dont. Deuet oun, hirio, renet gand ar steredenn, dirak an hini a zo ar gwir sklerder, dirak gwir heol ar justiz. Mar d'eo roue hennez, ne ket hep ken roue an douar eo ez eo, mez roue ar baradoz ive. Ha piou a c'hellfe beza roue ar baradoz nemet eun Doue ? Rak se, azeuli a ran ac'hanout gand eur feiz beo. Rak se me az ped a greiz va c'halon. Setu eur voestlad ezans. Ne lakaer ket an ezans da zevi, ne lakaer ket e voged da zevel, e doare eur bedenn, nemet dirak eun Doue. Bugel deuet eus an nenvou, te zo va Doue a viskoaz da viken.

Lakaat a ra ar voestlad ezans dirak ar Mabig Jezuz, hag a ya eun tamm pelloc'h a gleiz.

BALTAZAR, o tougen eul lestrig mirr, hag o plega e c'hlin deou, dirak ar Mabig Jezuz

D'am zro eo, va mabig Jezuz, d'am zro eo lavarout d'it ar pezh a laka va ene da dridal gand anaoudegezh vat. Evel m'en deus great Melkior, saludi a ran ennout ar roue, met eur roue hag a zo en em c'hreat paour. Evel m'en deus great Gaspar, azeuli a ran ennout ar Doue, met eun Doue hag a zo en em c'hreat den. Pegen bras ! peger souezus eo an

dra ze : eun Doue deuet da veza den ! Pegen enorus
eo evidomp ni an dra ze : korf an den kemeret gand
eun Doue ! An den eo a saludan ennout, bugel
bihan, flour evel eur rozenn dindan da vaillurou
gwenn. Gwenn int a dra zur, gwenn evel al lienenn
leun a c'hloar, ma vezo lekeat enni, en amzer da
zont, da gorf maro, balzamet gant c'houez vat ar
mirr. Setu e teuan eus ar zao-heol, dirak ar c'horf
santel ze, great dioc'h hon heveledigez. O krouadu-
rig koant ! Koulmig ar baradoz ! Oanig an Aotrou
Doue ! Bleunenn ar Werc'hez ! meuli a ran, enori
a ran, azeuli a ran ac'hanout gand holl garantez
va c'halon.

*Lakaat a ra al lestrig mirr dirak ar mabig Jezuz,
hag a ya eun tamm pelloc'h a gleiz.*

XIX DIVIZ

AN HEVELEP RE. TUD EUS A VETLEEM
o tont ebarz

*An elez, ar rouaned, ar vesaerien hag ar re all,
a gan gant levenez, gwers ar c'hraou, holl a unan.*

GWERZ AR C'HRAOU

War don latin : *Adeste, fideles ..*

Deut aman, tud fidel, ganeomp ni da welet
E Betleem, ar gearig venniget
Roue an elez, hirio nevez ganet.
Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

O lezel o derved, setu mesaerien geiz
Galvet gand elez, zo deuet gant gwir feiz. .
En em veskit holl, buan, en o c'hreiz.
Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

Sklerder santel an Tad, aman, en em c'holo
E korf eur bugel, ha c'houi her gwelo
Mailluret war e zournadig kolo.
Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

Pokomp d'ar paour kezik hag a zo gourvezet
Er c'hraou, evidomp. Piou ne garfe ket
An hini ma 'z omp gantan ker karet ?
Venite, adoremus, venite adoremus,
Venite, adoremus Dominum.

AR GOEL A ZISKENN

Diocèse de
Quimper & Léon
Evêché de Quimper & Léon

Document numérisé en 2016